

# Martoloded Breiz e Dixmud

(Eus a Wengolo da Here 1914)

D'am mignon Cyrille Ar Barvek (Le Barbu), pourvezour el « Lycée »,  
 mab d'eur c'habiten an Islanded, e kinnigan ar Werz-man.

E-harz menez Are, e parrez ar Fouilhez,  
 Bugel yaouankik-flam, e kleven alïes  
 Meuli an dud a vor, enor hon c'horn-douar,  
 E peb amzer dizaon, iskuit, taer ha dispar.

Breman, war ziskar-oad, o chom en eur gêr vras,  
 E veulin anezo kaeroc'h evit biskoaz  
 O stourm war an Izer, du-hont en Hanternoz,  
 A-gevret (1) gant tud vat ar Veljig ha Bro-Zôz.

O vailhantiz 'zo bet, o burzud souezus !  
 Ken anat, ken uhel, ken bras, ken talvoudus  
 Ma laka sebezet hon Enebour touet,  
 Ma vez brud anezo e pep lec'h eus ar bed !

Ar begad-douar-ze a zo breman santel,  
 Rak warnan e voe graet eun taol-kaer a vrezel,  
 Gwella hini, moarvat, 'voe graet dindan an nenv,  
 Hag hen bet, war eun dro, ha talvoudus ha krenv !

Eun taol-kaer 'n deus kresket da vro-Frans he brud vat,  
 Diskouezet n'ez a ket he buhez war fallât,  
 Hag embannet ez eo galvet da virviken  
 Da veza digabestr 'n he zao rak an Estren.

Dindan eur gwir-Vreizad, Ronarc'h, o amiral,  
 Hag int nebeut a dud (2), met holl tud didamall,  
 E-pad *pevar devez* urziet da enebi,  
 E stourmjont *peder zûn* hep morse diskregi.

A drugarez d'ezo ar « Prus » 'goll an devez ;  
 Derc'hel start a reomp kêr Dunkerk, porz Kalez,  
 Hag ar « C'haizer » a wel e zoudarded garo  
 O koueza a-steiou, falc'het gant ar maro.

Hon martoloded Breiz, gwell c'hoaz 'vit ar zouaved,  
 A red a-dreuz d'an tan, o souezi ar Veljed,  
 Gleb, goloet a fank, dihelc'het o youc'hal :  
 « Dao atao ! Boul-c'hurun ! Er-maez, banden chatal ! »

(1) Assamblez.

(2) 6.000 a eneb da 40.000, pe ouspen.

Ar c'homzou-man 'glevis gant eur Belj 'oa eno :  
— « Biskoaz ne voe gwelet, biken den ne welo  
Kaeroc'h 'vit 'm eus gwelet : tud a vor kounnaret,  
Lufr en o daoulagad, o koueza mac'hagnet,

O sevel kalonek, da gregi a-nevez  
Keit ma chome ganto eun tamm nerz ha buhez,  
'O pedi, kent mervel, Doue en eur goueza :  
« 'Traou Doue benniget ! *Fiat voluntas tua !* »

Tud dizaon evel-se a ra enor d'o bro.  
N'oufen hep daskrena, zoken hep skuilh daero  
Achui va diviz... Va c'halon 'rank frailha... » —  
Hag e kuzas e benn heb ardou da ouela.

— « Goude, emezan c'hoaz, 'n eur c'hlanvdi 'm eus kavet  
E kêr an Haor-Nevez eur martolod gloazet ;  
Gwelet 'ran anezan astennet 'n e wele,  
D'hon Tad eus an Nenvou prest da rei e ene.

Goustad, eun abardaez, dre eur vouez enkrezus,  
E zremm dislivet-oll, d'in 'laras truezus  
Skriva al lizer-man d'e dud e Breiz-Izel :  
« Gouzout a ran ervat 'moun o vont da vervel... »

« Pa gouskin er vered e-touez bezieu estren,  
« Laket war va gourvez etre pevar planken,  
« Deut eun deiz, mar gallit... O ya, deut em c'henver !  
« Bet asur 'vin kouezet oc'h ober va dever.

« O va mamm, o va c'hoar, dalc'hit sonj ac'hanoun !  
« D'ar zul, en oferen, pedit holl evidoun.  
« Kenavo, tad, breudeur, ha c'houi, muia-karet !  
« Mirit mat ar walen am boa 'n ho piz laket... »

En noz e tremenas... Jezuz d'e bardono !  
N'ankouain ket e skouer ; heuilh a rin e roudo.  
Hag enor d'ec'h, aotrou ! Enor d'ec'h ha d'ho tud,  
P'eo gwir oc'h kenvroad da Vretoned Dixmud ! » —

Da 'voe ganen klevet ken kaer meuleudigez...  
Lavaromp ni ivez : « Gloar, enor, trugarez !  
Ya, gloar d'hon tud a vor ! Ha gloar d'hon Breiz-Izel.  
'Oar maga sort tud vat, tud a galon-uhel ! »

*Sant-Brieg, 15 a viz east 1915.*

YVONIG PICARD.